

ar c'hloc'h a zon uz d'ar bar - rouz, ar c'head u - hel a zo di druz di - druz ha
 sioul' vel eun i - liz, War an douar e koez ar gliz.

Ar c'hloc'h a zon 'uz d'ar barrouz
 Ar c'head uhel a zo didrouz
 Didrouz ha sioul 'vel eun iliz,
 War an douar e koez ar gliz.

Ebarz'ar park, ebarz ar prat
 Oar ehanet da labourat :
 Klozet deliou ar bokidi,
 Al laboused ét da gludi.

Ha war ar bod, a-uz d'ar waz,
 Evnig bihan, c'houi a gan c'hoaz;
 Evnig bihan, poent eo tevel,
 Gant aon ne glevfe ar sparfel.

War ar roc'h vras 'ma o' selaou,
 E lagad lemm ruz 'vel ar glaou;
 Evnig bihan, dous ho mouezig,
 Evnig bihan, it d'ho neizig.

Ne glevit ket 'vel soniri,
 Soniri noz ha kaniri,
 Soniri gaer hag a luskel ?
 It d'ho neizig a denn askel.

It d'ho neizig, skeud ar bod roz
 Kuzet du-hont e lein ar roz
 Ma klevin c'hoaz varc'hoaz vintin
 Ho mouez ken dous ha ken sklintin.

Son ar Jistr.

Kanomp hirie, ma mignoned, kanomp war an dro
 Ar jistr koz hag ar jistr nevez brudet e peb bro
 Gwellan evaj'zo er bed-man,
 Hag, ouspenn ze, ar yac'husan.

Ar jistr mat gwad an avalou, sklêr evel dour aour,
 Dor e zec'hed d'ar pinvidik kenkoulz ha d'ar paour
 D'an dud vras ha d'ar vugale,
 E ro nerz, ya, leiz o jave.

Ar jistr dous a garg a furnez penn ar yaouankiz;
 D'hon merc'hedou e ro ive gened ha koantiz;
 Dousder a laka 'n o zellou
 Ha karantez 'n o c'halonou.

Ar jistr mat a zo burzudus evit ar gosni;
 Netra na argas eveltan an drouk-izili;
 D'hen evan mar gallfemp derc'hel,
 Birviken ne renkfemp mervel.

Pa vo deut hon zro, eun devez, da vont d'ar bed all
 Diskennomp e karr an Ankou, heb ober gwad fall;
 Du-hont, pep hini a gavo
 Jistr da evan'r pez a garo.

Dishan
 Taol ha taol,
 Alo! paotred, jistr d'an daol!

VI
 Ebarz ar jistr enebet e Spina a hys ty,
 Hag ar quin ar dant kempellat gant
 ar mallet. nu!
 Ebarz ar jistr enebet e Spina a hys ty,
 Hag ar quin ar dant kempellat gant
 ar mallet. nu!
 Ebarz ar jistr enebet e Spina a hys ty,
 Hag ar quin ar dant kempellat gant
 ar mallet. nu!